


Sant Sulian (Melioneg) / Saint Julien (Mellionnec)



Diskan :
 'Veldoc'h soudarded da Zoue,
 Er brezel 'eneb ar wir feiz,
 Sant Sulian a varvas kentoc'h
 Evit nac'hein feiz e dud kozh.

Refrain :
*Comme vous, soldats de Dieu,
 Dans la guerre contre la vraie foi,
 Saint Julien mourut plutôt
 Que de nier la foi de ses aïeux.*

1 - Selaouit holl, ha selaouit
 Ur c'hantik zo nevez savet,
 En enor d'ar soudard merzher
 Dibennet evit hon Salver.

*Ecoutez tous, et écoutez
 Un cantique nouvellement composé
 En l'honneur du soldat martyr
 Décapité pour notre Sauveur.*

2 - Sant Sulian 'oe hag ar c'hreisteiz,
 Hag ar vro anvet *Dauphiné* ;
 Er gêr a *Vienne* eo bet ganet
 Hag a dud vras, a dud meulet.

*Saint Julien était du midi,
 D'un pays nommé Dauphiné ;
 Il est né dans la ville de Vienne
 De parents nobles, de parents estimés.*

3 - A-vihanik 'kare Doue,
 Ha 'vel soudard hen servije.
 Pebezh kentel evit ar re
 O deus da vonet d'an arme !

*Depuis son enfance il aimait Dieu,
 Puis il le servait comme soldat.
 Quelle leçon pour ceux
 Qui doivent aller à l'armée !*

4 - En amzer-se 'savas trubuilh,
 'Kouezhe kristenien el grizilh
 Dre urzh un impaler paian
 Anvet gantê Dioklesian.

*En ces jours-là survint un trouble,
 Les chrétiens tombaient comme grêle
 Par ordre d'un empereur païen
 Qu'ils appelaient Dioclétien.*

5 - E Brioude 'oe n'em gavet
 E ti un intañvez lojet,
 Pa glevas mouezh an archerien
 Oc'h ober goulenn war e benn.

*À Brioude, il s'était trouvé
 Logé chez une veuve,
 Lorsqu'il entendit les archers venir
 Poser des questions à son sujet.*

6 - Dirak ar barner eo kaset ;
 Eno dispont en 'eus laret:
 « C'hwec'h vloaz war'n ugent en arme
 Em eus servijet ar roue. »

*Il est conduit devant le juge ;
 Là il a déclaré sans peur :
 « Vingt-six ans dans l'armée
 J'ai servi le roi. »*

7 - Er brezel seizh gwech ec'h on bet,
 Biskoazh n'em eus bet disantet ;
 Da stourm 'oan kenkouls hag un all,
 Evel soudard on didamall.

*J'ai été sept fois à la guerre,
 Je n'ai jamais désobéi ;
 J'ai combattu autant qu'un autre,
 Comme soldat je suis sans reproche.*

8 - Gant enor em eus servijet
 Impalaer Rom 'vel oa dleet.
 Da Jezuz 'vin ivez fidel :
 Nac'hein Doue : "Kentoc'h mervel!"

*Avec honneur j'ai servi
 L'empereur de Rome comme il se doit
 Je serai fidèle à Jésus aussi.
 Renier Dieu : plutôt mourir.*

9 - Ne oa ket e gomz peurlaret,
 E benn a zo d'añ hanteret
 Ha distaget diouzh e zivskoez.
 Kristenien, pebezh un druez !

*A peine fini son discours,
 Sa tête est coupée
 Et détachée de ses épaules.
 Chrétiens, quelle pitié !*

10 - Daou zen kozh hag int dinec'het
 E gorf er bez o deus lakaet.
 Hag an daou-mañ dindan ar samm
 An neus n'em gavet yaouank flamm.

*Deux vieillards décidés
 Ont mis son corps dans la tombe.
 Et tous les deux sous le fardeau [du corps]
 Se sont retrouvés tout jeunes.*

11 - Hemañ eo ar c'hentañ burzhud ;
 Kalz a re-all o deus graet brud
 Vel ar fantan kenkent savet
 Lec'h 'oa bet e benn diskaret,

*C'est là le premier miracle ;
 Beaucoup d'autres sont célèbres
 Comme la fontaine née à l'instant
 Là où il avait été décapité,*

12 - El lec'h an dud o deus kavet
 Gant dour anezhi ar yec'hed,
 Terc'hienn tri deiz, terc'hien pevar deiz
 Ne c'harzhe ket d'oc'h an dour-se.

*Lieu où les gens ont trouvé
 Par son eau la santé,
 Fièvre de trois jours, fièvre quarte
 Ne résistaient pas à cette eau.*

13 - O sant Sulian, patron karet,
 A lein an Neñv deuit d'hor mirout.
 Deskit dimp-holl 'hed hon buhez
 Karout hon bro hag hon Doue.

*O saint Julien, patron chéri,
 Du haut du Ciel, venez nous garder.
 Apprenez-nous tout au long de notre vie
 À aimer notre pays et notre Dieu.*